



CHANSON AN DANCOU

Var un ton nevez.



Tostait amâ, tud a s'ient, me o pedhac o supli;
Manet e zôn amâ bouhet gant va oll filosofi;
Crignat a rân va biziet, ha frotta a rân va zal,
Hep gallout birviquen compren, en laret rân
hep farçal,
Ar charmantis d'ar yaouanqis da lampat ha da
zançał.
An habitaed-se a deu gante, me a gred, var
an donar,
Pe autramant en contractont da dri bloas pe
da bêvar,
Vit p'ello ar grennardezet treina o c'hotillonen,
Hac ar grennardet o-unan boutoni o braguezen:
Na eller pelloh o derhel, ar yaouanqis so'n o fen.
Un tam oc'h diveat, bêleyen, d'o c'hervel
d'ar c'hatekis,
Ha pa ve possubl ec'h alfec'h, da gass o c'horf
d'an ilis;



512

O speret a so en dançou , gant se ne raint netra ,
 Da galz deus o questionou o guenoyou a lavar *ha!*
 Pa c'houlfet hac int vo christen , e respontint
ta la la.

Neuze ec'h efet e coler , hac o zretot a ezen ,
 Ha gouscoude m'en em sonchfec'h , na noc'h
 mann en o c'hichen :

Noc'h qet capabl , gant oc'h oll studi , evelte
 d'en em beintàn :

Pelec'h oufec'h-u c'hui laqat jour en ur c'hoef
 doublet a ràn ,

Nac o mouchouer en qalqen , pelec'h oc'h
 manet bremàn ?

‡ Na neus libouden a bemp bloas na zesco
 dêc'h ho gentel ,

Bea o deus ur mizilour , pintet inten demezel
 Dec'h e voa en e jaqeden , na vouie qet e *Fater* ,
 Dantelezet ê e c'hoefou , brodet ê e danvancher ,
 Friset eo e c'hotelinen , rubanet e boutou lêt.

Me gred e clêvàn ar zoner savet var e variqen ,
 Tano ê discouarn ar merc'het , sevel a reont
 o fenn ;

Deustu' comañcont da vresqen adreus an ed ,
 ar c'bleuyou ,

Vel pa ve an diaoul var o lerc'h , pe ottramant
 an ancou ;

Ha pa ve an ifern da dreuji , bepret e zint d'an
 dançou .

Pa vint aru var ar blenen elec'h ma vo an ebat,
 Evit n'em disques d'ar botret, e clasqint eur
 c'hleus benac ;

Neuze fichint o davancher, e tressint o zoaleten,
 Evit pa dremenint potret charmi o amoursien,
 Rêi da emâ urser-lagad, d'eguileur c'hoarsaden.

C'hoes ar botret, pa dremenont, a ra strica
 o c'halon ;

O daoulagat so flamboesou alumet gant Cupidon :
 Trei ha distrei a reont tout, gant c'hoant da veza
 qerc'het.

Qement e c'hrillont gant anvi da veza souden
 biget ;

Penevert n'en dê qet ar c'his, e larjent : hastit,
 potret.

Ar botret so er c'hostez all destumet a van-
 dennou,

N'int qet vit dere'hel o bragou, anez caout
 ur bretellou ;

Ema'llêz e bego friou, roet gant o mamou dê ;
 Tri anê ne dint qet capabl da gass bioc'h d'ar
 c'holle :

Cetu eno ar ganfardet a so tançal nos ha de.

Ne oun ha me a zo trouplet, pa velân peder
 demezel,

Pebabarapluisogante, me gredseipesatin scler ;
 Ma vije bet tom an amzer, o doa peb a barasol,
 Evit beza distinguet mat hac enoret gant an oll ;

O daouarn a so maneguet, d'ampech roussagant
an eol.

Patiantet, ô va Done! n'allân mui en em souten,
Un debiter, benos Doue, n'eus ur montr en e
c'hodel;

Neus messaer moc'h na devet, digoc'her saout
na qezec,

Ne neus ur bragou pont bian hac ur giletten
fleuriet,

Na zoug e doc var gostez e scouarn, ur c'hora
butun en e veq.

Pêvar ha pêvar e zeont da saludi o mestrez,
O zoc en o dorn e c'houlont: Be o po ar vadelez..
Hep goitos sin ar c'hompliment, ar plac'h a
respont ia;

Qement e deus c'hoant da lampat, qement e
mâ bars en joa,

Elec'h rêi dezàn e c'houlen, e carfe en briata.

En ur rond en em laqeont, evit comanç da
lampat;

Mar dê pec'het sellet dançal, o discoe na ne
qet mat.

Disparissit, gestou lubric, impudicationou,
Disparissit, disparissit, Danç, vocen an eneoù,
Invantion an drouc-speret, evit boeta ar flamou.

Neuze vo an demezelet n'int qer qerc'het
da zançal,

Oc'h ober an dro d'an dançou, hac oute tout

façou fal ;

O minou a ziscoe facil in antreet en coler,
Mantret e zeo o c'halonou ; vit apesi o c'holer
Da gritica an dancierien ec'h implijont o amzer.

Sel, emei, pesort libouden a so da zançal
qerc'het !

Onnes a so ursovajen na voar na comz na qerzet ;
Sel penos e mâ e dillat ! sur ne deus qet teir ivis,
He zad so e clasq e vara ; sellit ouseven d'ambis ;
Ouspen trêgont vloas neus honont, e bleo a so
dija gris.

Sel peguen sote zeo onnese qichen ec'havalier,
Neusfors petra lar arsoner, nera nemettêr-a-têr ;
An antrecha, an êl de pijon a ra tout gant al lete ;
Re bouner e zeo e boutou, na zistag qet ar brize ;
Vals, chasse-huit n'ententont qet, na voar qet
ar *balance*.

Me a vel an eol o cuza, finissa ra an dançou :
Ar plac'het a lamp d'ar botret, da furchat o
godellou ;

Ret ê caout per pe avalou evit terri ar sec'het,
Biqen navint lezet tranqil, qen a lavaro ar botret :
Antreomp en hostaliri, m'or bomp un dra be-
naqet.

Complimanchou rêi ar merc'het, pa gom-
mançint da eva ;

Mes na vo qet fiu d'ar barti, na vo int vo argoassa,
Goalc'hi reont o gorsailen, guin ha gist a dre-

menont,
 Carzet è godel ar botret, ha bepret e leveront :
 Qen a vo bet ar guin-ardant, biqen d'ar guêr,
 na yefomp.

Crial hac huchal a reont en hent bras var boes
 o fenn ;
 Au ini o c'hlêse a grete e ve ur foar o tremen :
 P'êruint en o demeurañç, deus-tu' clasqint ar
 c'haignou,
 Ha ne zeus den evit compren petra a reont eno ;
 Badianchou hep son cleyer alies so'n ellejou.

Ar plac'h na gavo potr ebet, so e bêr istant
 chanchet ;
 Ec'hoefa laqa var e bisach, adieu a laro d'ar bed ;
 En e dorn zo ur chapelet, sances emâ o pedi ;
 Pa sonch en amzer dremenet, ue ra nemet
 hirvoudi ;
 C'hoant e deus da vont d'ar gouent, ha mui
 c'hoas da zemezi.

Cetuiaze en orêson ; hanval è eus ur zantez ;
 E ma' prometti da Zone ferm na zemezo jañes ;
 Essaara trompla Doue, mese c'homzou a solach,
 Racen instans ma cav ur pot e tol e frocer golach,
 E têt habit ha chapelet, evit comañç ar menach.

Trivac'h vlas neus an danceres, pa gav ur potr
 e teme,
 Hijet è bet hac adbijet coulz en nos evel en de :
 Ar pez a van goude hija a larer na dal netra.

Gouscoude ar pot e c'hemeraso carguet eus a joa,
Ha varben uu nebeud goude e laro *mea culpa*.

M'e guelfac'h e bars en dançou, ouunes a so
ur fleuren !

Admira a ra ar botret e c'hoantis hac e sçient,
Excelant e voa d'all labour, menageres ar gaerra,
Bep nos diveat da gousqet, sevel a rê da guenta,
Preciussa greg a vije; meschenchet e zê bremâ.

Mar boa coant, pa voa plac'h yaouanq, bre-
mâ eo vil da fleryal;
E c'hotillon zo cramennet, e blêo tennet var
e zal,

Dibren ê ganti e dillat, collet ganti e spillou,
Ar vic'hien demeus e fri a ziver en e guinou,
Evit e sonch, hep n'em vastar, eo ret caout
pincetezou.

Sans cess e mâ o cluchenni e ti e c'homerezet,
Pried, bugale ha menach, oll e vent abandonet,
Ne voar na canna, na gouelc'hi, na memes
scuba e zi,

Ne vanq na plous na foenn ennàn, carguet ê
a loustoni.

Evit antre ep vomissa, ê ret stoufa stard ar fri.

Pa za'n itron var e zorchen azeet en e c'hoaze,
Ha pa ve an tan dindanni, na zavo qet ac'haue;
Implijet ê tout ar voyen, na neus qen manet
netra,

Ret ê bremâ chench a vicher, ret eo mont da

glasq' bara.

An ozac'h, lec'h dont d'e c'honsol, a deu prest
d'e bazata.

Cetu amâ ur son neve, cetu amâ ur danç all:
Chasse-huit eo ret da ober, pe vea sc'et ractal;
Ha pa vanco an danceres deustu e devo ur vazad,
Hac ouспен tol troad en e r'eor, ma na ve buan
a droad,
An danç qenta voa amiabl, mes omâ na ne qet
mat.

Finissa a rân va Chanson, na bad pelloc'h va
sujet.

O pedi a rân d'am exous, mar emeus oc'h ofancet.
Qement-mâ a zo abuzou, n'o guelomp nemet
re bemde,

Hac a deu sivoas re alies d'offiansi ar Vajeste;
Bea int motivou indeçant eus a re a liberte.

FIN.



E Montroulez, e ty LÉDAN, Impr.-Librer.